

na ma plich ganec'h e sileofet  
 Eur wers a zo a newe groet  
 D'ar plac'hik *yaouank* o vond d'ar leodet

Pa voa o vont gant an hent bras  
 Daou kavalier a renkontras :

– Merc'hik iaouank din e leret  
 Pelec'h e c'het na mar goc'h bet ?

– Deus ar ger eo e deuan  
 D'ar Bardon er ieddet eo e c'han

me ia dar pardon dar ieddet  
 Mar lez Doue anon da vonet

Da kovessat da gomunian  
 Da c'honid ar pardon mar gallan

– C'hwi zo re vrao re a fesson  
 Da vont o unan d'ar pardon

– Otro, ma iskuzi a red  
 Va unan dar pardon ne dan ked

Da evan dour me a zo chomet  
 Va kompagnunez arog zo ed  
 mar dalean me vo kortoet.

Markis Coettredrez a lavare  
 De Palafrinier enon neuze :

– Distol di aman var *tailleur* va marc'h  
 me iell da tredrez buhan awoalc'h

eur wec'h all, plac'hik mé o tesko  
 Da ' chom da 'evan dour *deus dre n'* n'hentcho

– Gouarnerez hasta breman  
Lakas te ar ber eus an tan  
D'ober dar plac'h iaouank e c'hoan

na Pa voa ar koan oc'h tol rentet  
ar plac'h na zrebe tam e bed

– Palafrinier na deus en ti  
Kers te duze er sall gati  
Da c'houd ma chencho e faltaji

er zall gati e c'he bed ed  
faltaji n'en deus ked chenchet

na kers te er jardin gati  
Da c'houd ma c'hencho faltaji

Nag er jardin pa int bed ed  
Da pelia bokejo e nem laket

Da pelia bokejo roz-lavant

*geront*  
*deho eus*  
a ~~deront~~ ar plachet iaouank.

na pa voa e kokejo(1) dastumet  
ar markis enon zo deued.

Markis Koattredrez me o ped  
ho kontel dime e reffet

Da grenan treid va bokejo  
a zo re hir deus a treujo

– Merc'hig iaouank ma iskuzet  
Pot ar c'hontello me na non ked  
va pognet ~~archant~~ a po pa kerfet

Markis paovezit ouin me  
me zo eur plac'h a galite  
C'hoar vager on da Lezobre

– me ne ran fors a lezobre  
 Ken neubeut a ran ouzit te  
 Be am bo ac'hanout fe te (2)

Div eur horolach pe houspen  
 e bet oc'h ar markis o c'houren  
 Diarc'hen a dizolo e fen.

itron varia a vulat  
 konsolit va mam a va zad  
 Biken no goëlo va daoulagat

ouzach guerchez e choulenan  
 pe me neum laz pe me na ran

abalamour dach Guerc'hez vari  
 ne choulenan ked o c'hoffensin

Pa et dizroet an otro en dro  
 e voa ar plac'h voar e geno

en eur poull goad ag i maro

– Penervet daonni va ine  
 n' woac'h ked ed goe(r)c'h dirag Doue.

Oll(4) ~~dean~~ dud va zi ma nem c'heret  
 Pel e an noz id da kousket  
 Nan Doue nan(3) diskuillet ket

– ar gouarnerez neus respontet  
 mar a weach e moa e kelenet  
 ag a balamour dar merchet

Nag oman evid ar muan  
 C'hoar vager n'otro K/nenan  
 a lakeio o goad da ienan

nan neus servicher en o ti  
 na voar o nozvez koulz a c'hwi.

ar Palafrinier vel ma klevas  
a vriad er plac'h iaouank a krogas  
var dailler e va(r)c'h en e lakas

Gant e vantel en deus i goloet  
Gant aon na viche anaveet  
gant an dud e vont dar leodet

ar merc'hik iaouank a <sup>welle</sup> ~~hirvoude~~  
~~a ken traegas~~ nag en er glem  
~~ag en eur woelan~~ a lavare  
de c'hompagnunez dre ma tremene :

– ma c'hompagnunez ma nem c'heret  
en anon Doue ma sikouret  
ma dime ganec'h dar leodet

*o chikour siwas ne hellomp ked  
pa 'e gant an otro markis e heet*

– Ma vije gant eur all a viche  
Petek ar maro ni o sikourche.

*ar plac'h iaouank a hirvoude  
na gafe den e c'honsole  
ar palafrinier a re a voejou  
a nefoa true eus e c'hanvou*

*tavit merc'hik na voelet ked  
me virou no po droug abet*

ar Plac'hik iaouank a lavare  
en Kastel Tredrez p'an arrie  
D'ar gouarnerez enon neuze :

– Bezit ewid on advokadez mad  
ni ielo hon diou en eur golead

– na neo ket da gousket ganime  
oc'h digasset da Koat tredre

Groet hi ho goele er kampik kloz  
Gant ar markis vefet fenos.

nan Doue nam diskuillet ked  
 Peb a kant skoet dech a vo roet  
 en chapel tredre vo interret

---

*n' woa ked kanet ar c'hog dan de  
 pa woa torret ar perjer en tredre*

*pa woa perjer tredre torret  
 gant K/nenan hak e botret  
 nag ar markis pelec'h e het ?*

*ar palafrenier pa klevas  
 gant ar vins en traou diskenas*

*— ne medi ket ma mest woar dro  
 na bet eun daou pe tri de zo*

*— gaou a lerez palafrenier  
 ma na vije ket da vest er ger*

*ne voas ket aze palafrenier  
 Kustum out a res mont*

*ma c'hoar mager Kerc'hi dime  
 pe me lakai'an tan en tredre  
 a buhe an otro em m'o fete*

*Na tredre deus en tour huelan  
 a lere neuze da K/nenan*

*Lezet te ganime ma buhe  
 a me rei'dac'h ma oll danve ( 5 )  
 me rei'dac'h ma rent a ma leve.*

*neket ta rent a ta leve  
 a ta danve a fell dime  
 ne me ma choar mager a klaskan  
 a klevan larat a zo aman  
 a buhe wid buhe a choulenan*

*cri viche ar galon na voelche  
 en tredrez an eb a viche*

*e voellet an tan gwal en ti  
 ar markis o kreis e leski*

*e voellet an tan gwal er maner  
 ar markis e kreis da choulaer*

*ar plac'h iaouank en en c'haross  
 Da vont da enterri de paros*

*n'otro Lezobre en eur leter  
o tougen ( 6 ) kaon de c'hoar mager.*

*Nombreuses ratures dans le Ms.*

*Il n'y a pas de titre .*

*(1) Ms : kokejo ; lire : bokejo.*

*(2) Le t de fe te, écrit en surch. sur un d .*

*(3) L'n final de nan, écrit en surcharge sur un m :*

*(4) Ce mot «oll» me semble écrit en surcharge sur «An».*

*(5) le v de danve écrit en surcharge sur un f.*

*(6) le t de tougen écrit en surcharge sur un d.*